

ITRON VARIA AR VUR BENIGUET,

non signet. of ultra



PEDIT EVIDOMP.

**Ar C'hantic-mà a verzer
e profit ar Chapel.**

CANTIC

VAR AR CHAPEL NEVEZ

SAVET E GUERED CÔZ SANT-VAZE,

ADRÉN CROAS AR MISSION,

EVIT

Itron Varia ar Vur,

ER GUER A VONTROULEZ, ER BLOAVEZ 1834.

Var ton : *Jesus, Salver adorabl, pe Santez Mari.*

~~~~~

SAVET a so ur Chapel er guær a Vontroulez,  
Adrén Croas ar Mission, tost d'an Ilis Parres,  
Da ITRON VARI AR VUR e vezo dediet,  
Eno e frotection a vezo obtenet.

Distrujet dre an arraich eus an impiete,  
Ilis genta ar Verc'hes, Patrones ar c'hontre,

N'en deo qet, e nep fêçon, bet possubl e sevel  
 Er plaç ma voe bet gueichall an templ-se qer  
 santel.

Mes, dre brovidanç Doue, ha sicour eneo  
 mad,

E zeus batisset un templ en eul lec'h deread :  
 D'an oll bobl fidel eno e vezo permetet  
 Enori o Mam gommun, a galon, a speret.

Hi a so ar stereden placet er firmamant,  
 Pehini, dre e sclerder, bepret caer ha brillant,  
 A gundu ar gristenien adreus hentchou diez,  
 Da arruout sur er pors eus ar zilvidiguez.

Neo qet possubl niveri peguement a c'hraçou,  
 A favor hac a viracl grêt en oll amzeriou  
 Dre brotection MARI, Guerc'hes ar Guerc'heset,  
 Dre hano ITRON AR VUR, partout anaveet.

Ah ! pet gueich ar bec'herien cazi en disesper,  
 O pedi dirac imach ar Vam-se qen tener,  
 O deus cavet esperanç ha consolation,  
 Hac ar c'hraç qen precius eus o c'honversion !

Pet gueich, ar mamou devot, o deus dezi  
 goestlet

Bugale clàn , languissant , en danger exposet ,  
 Hac o deus rentet graçou d'an dorn qen gal-  
 lous

E deus bet o delivret eus ur maro fachus !

Prest da veza confrontet er môr bras en furor,  
 Ar vartoloded dezi o deus rentet enor,  
 O velet dre e feden an tempest arrêtet,  
 An abim eus ar maro dindan o zreid serret.

Er boan speret, er chagrin, hac en affliction,  
 En eur bedi gant güir feiz, ha güir devotion  
 Dirac imach burzudus ITRON VARI AR VUR,  
 Pet a gav bemdez refuch hac un asil assur !

Evit rei sclær da entent an nerz eus e gallout  
 En ên ha var an douar, ne faut nemet anaout  
 Ar burzudou e'hoarvezet, memes en hon amzer,  
 Hac a so anavezet var ar meaz hac en qær.

Pa gouezas an tour superb eus e Ilis qenta,  
 E veljot eus a bep tu ar miraclou brassa.  
 Re hir e ve dîn antren en detaill anezo,  
 Unan pe zaou eus ar rest testeni a rento.

Ur vam dezi e buguel a recommand ractal

Evel ma cleo ar revin eus an tour o crosal :  
 Ar vam a voe en e c'hambr, ar buguel er scailler,  
 O daou o deus bet santet sicour Mam hor Salver.

Ar vam dindan ar revin divac'haign so cavet,  
 Dreist ar ru en un ty all ar buguel so stlapet,  
 En creiz an tyes cuezet an eil var eguile,  
 Dindan un treust eo cavet joaüs, leun a vue.

E qichen qær Montroulez, ur c'hrouadur  
 yaouanq,  
 Cuezet ebars er rivier, sclejet gant an tarrant,  
 Da ITRON VARI AR VUR gant e vam voe goestlet,  
 Hac eus a zindan an dour hep drouc eo bet  
 tennet.

Deut eta oll, christenien, tud devot d'ar  
 Verc'hes,  
 Deut gant fizianç d'e fedi, en e Chapel nevez;  
 Mam d'hor Salver adorabl, e deus autorite  
 Da c'houlen ha da obten peb tra digant Doue.

Ar Pardon, evel gueichal, a so instituet  
 Gant an Escop a Guemper, da Sul bras an  
 Drindet.

Pebes laouenidiguez evit pobl ar c'hanton ,  
O velet nevezat e Chapel , e Fardon.

Ra blijo gant ar Verc'hes selaou hor pe-  
dennou ,

Ha pledi evidomp oll e qichen hon Autrou :  
Obten ar güir sclêrijen d'ar re dall , ignorant  
Yec'het , resination d'an dud clàn , languissant.

Ar guær eus a Vontroulez , ar vroyou tro  
var dro ,

A bep amzer o deus bet enoret e hano ,  
Hac a esper dre enni brassoc'h madoberou  
Dre ma cresco evit-hi o devotionou.

Va zeod a sclasso qentoc'h eus va staon em  
guinou ,

Va goad a cesso qentoc'h da redec em goaziou  
Eguet ne vanqen james da gana meuleudi  
D'am Mam , d'am Avocades , d'am Rouanes  
MARI.

F I N.

Les belles laouénidigues evit pobi ar c'hanter  
 O velot nevezet e Chapel, e Hardon.  
 Ra hlijio gant ar Verc'hes seloun hor pe-  
 deannon,  
 Ha p'ledi evidonq oll e dichen hor Añtron:  
 Oblet ar g'f'it selijon d'ar re dall, ig'erant  
 Yec'het, resinaton d'an dud etan, lang'issant.  
 Ar g'f'it evit a Yantouler, ar vroyou tro  
 var dro,  
 A bep amzer o deus bet enoret e hano,  
 Hec a eper dre enni brassoc'h m'adobron  
 Dre ma c'resco evit-hi o devoñson.  
 Va zeed a sc'isso pentoc'h evit va zision em  
 g'f'it  
 Va goad' a c'esso pentoc'h da redet em goz'f'it  
 Emet ne vander james da g'f'it m'ev'andi  
 D'am Mam, d'am Avoader, d'am Rouaner  
 -MARI

FIN